

XXXVII

Poë

En hiaul zo e seüel

En hiaul zo e seüel kammein hre en éneel
 Me huet e kreiz er lann men dousig e tonet

Me he guel e vrochennat, en ur gan en sonnen
 Tre men de dre el lann he lanned e tremen

A p'arvü tostij d'éin me halon e hra joe
 Me lausk ur peziñ kam. he me reiskond eue

- Bonjour d'oh Margeitig bonjour d'oh a galon
 Get un amzer hen kaer, petra laret, mignon?

* ~~Me houe~~
 - Me houian me Loeizig, ne houian nitra vat
 Me houian meit kammein, kammein ha brochenne

Neoh o Margeitig, pen de er bleu e' gae
 Kalon ur verk iouank zeli bleuein eue

Me halon me Loeizig, e ve berpet eures
 Be huelan me mignon a p'ér guelan joein

Laret d'éin Margeitig pui enta hou mignon?
 En hani e garet zo joe én e galon

Harse o bugulez huer choejët un eutru
 Hag hou kronnæs a eur ha dantel a beptu

Petra e kreken me' e' te un eutru bras

Cel d'oh me keh lonned ha dok me fracted glas

A non pa sur Loezig, un eutru n'ém lo ket

Ar mezeu e' chomein get men quellan karet

En hanni e gavan n' e ket p'el azohem

N'en de' ket un eutru, mes dan houi me hovin

Le gannan en sonnen m'ér kleu e' huitellat

Saill e' ha me kalon p'ér quellan e' tostet

Hun bochieu liès mat el lanneg didrouzen

Hun geij hag e vucl p'el hun haranté' paden

Elté' o me mignon e' hareken quellet

Margeutig ha Loezig eit berret unanet

t greiz kalon Margeit- trugere trugere

Mar don karet goroh hui zo karet eue...